

FY_0052_Ar miliner laer

Ma mamm, roit din ma dañjerig (dañjer = tavañjer)
Rag me a zo o vond d'ar vilin

Ho tañjerig, c'hwi n'ho-po ket
Ha d'ar vilin c'hwi n'an it ket (c'hwi n'it ket)

Ma mamm, roit din pe ne roit ket (var: pe ne rit ket)
Rag d'ar vilin eo red moned

Rag me a glev ar sonerien
O, war pont ar vilin o seniñ

Rag me a glev an talabarder
Emañ o soniñ war ar chaoser

Rag me a glev ar ganerien
O kanañ war ar wenjenn

Hag aet eo Mari d'ar vilin
Tapet he-deus he c'hoef mousselin

He c'hoef mousselin, he botou ler
Evid plijed d'ar miliner

Toull ar vilin pa oa arruet
Ar miliner a oa kousket

Savit alese, miliner
Da valañ ma sac'had, o tond d'ar ger

Petra a zo ganeoh e-barz ho sac'had
Eh out war ar maez ken diwezd

Kerc'h ha segal ha gwiniz du
P'emañ ho milin war he zu

Pe war he zu pe n'emañ ket
Bremañ-souden e vo lakaet

Ha dre ma'z ae ar greun er gerl
Ar miliner a boke ferm

Ha dre ma'z ae ar brenn er brank
Ar miliner a boke stank

Ha dre ma'z ae ar bleud er zac'h
Ar miliner a oa mestr war ar plac'h

Hola, hola, milinaer laer
Torret az-peus din las ma dañjer

N'eus ket ken nemed banden ma broz
Da dorrañ ar bec'h diwar ma c'hof

Ma vez torret, torret e vo (var: ha graet e vo)
Kemenerien a-walc'h a zo er vro

Kemenerien a-walc'h a zo er vro
C'hwi a glasko ha me a baeo

Warc'hoaz me a yae d'ar foar Rostren

Da brenañ deoh eun davanjer gwenn

Me a yae da foar Sant Nikolaz
Da brenañ deoh eun davanjer glaz

Ha seiteg deiz ha triwec'h miz
A oa bet an aotrou e-barz Pariz

Ha bremañ pa distroet er ger
A oa chañchamant e-barz ar maner

Chañchamant a zo evid ar momant
Ha ma intron, na pelec'h emañ?

Emañ e-barz he hambr an uhellañ
Tommañ he mab an terruplañ

Eur paotr bihan glaz e lagad
Ne oarer ket piou eo e dad

Ne oarer ket piou eo e dad
Ar miliner a oar se mad

Bonjour deoh-c'hwi miliner laer
Me a zo deuet da glask da gomper

O da gomper, me n'en ye ket
Rag ma milin a zo o valañ bleud

Rag ma milin a zo war rod vad
Ha doan am-eus e vije torret

(var: Hag aon am-eus)

Me a ouie awalc'h miliner laer
Vijes ket bet tad na gomper

Distroit 'ta miliner laer
Pe e ye ma botez-koad en ho reer!